

# Skol ar Brezoneg

---

## Pennadou-lenn evit Brezonegerien

(Niv. 6)



### I. - **Prosper PROUX :**

- 36. - Prosper PROUX : buhez hag oberou.
- 37. - Kimiad eur Zoudard yaouank.
- 38. - Distro ar Zoudard e Breiz.
- 39. - Tadig-koz ar Brabanser.
- 40. - Perinaig hag he fodad lêz.

### II. - EUR MARVAILH NEDELEG :

- 41. - Ar bleiz-marc'h (Breizadig).

### III. - BOAZIOU KOZ :

- 42. - Troiad an Eginane (Kervarker).

O. L. S. B.

(Oberenn al Leoriou-Skol Brezonek)

Brest - 1956



## Prosper PROUX

(1811-1873)

Ganet e Poullaouen e 1811, Prosper Proux en deus tremenet an darn vrasa eus e vuhez e Gwerliskin: e-pad e vugaleaj hag e yaouankiz, da genta, ha da c'houde, pa oa « paotr-an-tailhou » er gêr-ze, etre 1843 ha 1858.

Dalc'hmat o farsal hag o c'hoapât, Prosper Proux a deuas buan da veza brudet en e gorn-bro, pa oa paotr yaouank, evit ar c'hananouennou a zave e brezoneg hag a veze pedet dont da gana er beilhadegou pe en eureujou.

E 1838, e reas moula darn eus e zoniou dindan an ano: « CANAOUENNOU GRET GANT EUR C'HERNEWOD ». Ar c'hanaouennou-ze, avat, ma rênt plijadur tud ar bobl, a oa gwelet fall gant beleien ha noblañsou ar vro, dre ma oant goapaus, flemmus, skañvik alies, dizereat zoken a-wechou. Difennet e voe gant an Iliz lenn leorig Proux ha distrujet e voe ar pep brasa eus ar vouldenn.

Kalz diwezatac'h, Prosper Proux a lakâs embann eun eil dastumadenn a varzonegou, kanaouennou ha mojennou: « BOMBARD KERNE, JABADAO HA KANIRI » (1866). Disheñvel kenan eo an eil oberennig-se eus ar « C'hanaouennou »; labour eun den deut war an oad, siriusoc'h e skridou, ha c'hoant gantañ bremañ plijout d'ar vourc'hizien ha d'an dud desket.

Mervel a reas Proux, ezommek awalc'h, e Montroulez, e 1873.

Anavezet eo c'hoaz soniou Prosper Proux war ar mêz, e bro-Dreger hag e Kerne-Uhel: klevet e vez atao unan ben-nak, e kement fest-nnoz, beilhadeg pe eured, o fistaga: « Kimiad eur Zoudard yaouank », « An Amzer gwechall hag an Amzer bremañ », pe c'hoaz « Mari Beg-Arok ».

N'o deus ket holl skridou Prosper Proux kalz a dalvoudegez lennegel, daoust m'int leun a zaour peurvuia ha savet en eur brezoneg yac'h ha dibistik awalc'h. Meur a hini a zo diwar skouer soniou gallek, hag ar mojennou a zo troet diwar La Fontaine (evel ma reas kement a skrivagnerien vrezonek en amzer-ze).

Daoust ma n'eus ket skrivet kalz na traou a-bouez-bras, bez ez eo Prosper Proux unan eus ar varzed o deus digoret he hent da lennegezh vrezonek an XIX<sup>vet</sup> kantved.

Studiet eo bet buhez hag oberou Proux en eul leor e brezoneg savet gant Taldir hag embannet e 1913.

(Prosper Proux. — Studiaden war e vuhez, e lizerou e varzonezh, staget outi eur vouldenn nevez eus e holl oberou.)

## Kimiaid eur Zoudard yaouank

Ma c'halon a zo frailhet dre nerz ma enkrezoù,  
Ma daoulagad entanet n'o deus mui a zaelou;  
Deut eo, siouaz! an devez ma renkan dilezel  
Lec'h kaer ma bugaleaj, ma bro gaer Breiz-Izel!

Keno dit, ma zi balan, kuzet 'barz an draonienn,  
Tachenn c'hlas war behini, bugel, e c'hoarienn,  
Gwez ivin ker bodennek, e disheol a bere,  
E-pad tommder an hañvou, e kousken da greizte.

Keno! keno! mamm ha tad, bremañ n'esperit mui  
E chomfe ho mab karet da harpa ho kozni,  
Evit gounit deoc'h bara, 'vel m'hoc'h eus grêt dezañ:  
Al Lezenn zo didruez, ho kuitaat a renkan.

Nag a wech, ma mamm dener, e renkfet-hu leñva,  
Pa zeuy ma c'hi ankeniet endro deoc'h da ruza,  
Pa welfot, war an oaled, ma skabellig c'houllo  
Hag ar c'hevniid o steui war ma fenn-baz dero.

Keno! bered ar barrez, douarou benniget,  
Pere a guz ma c'herent gant ar Zalver galvet;  
Da ouel an Anaon klemmus, n'in mui war ho peziou  
Da skuilha dour benniget mesket gant ma daelou.

Keno! ma muia karet, ma dousig koant Mari,  
Eur blanedenn digar a zeu d'hon glac'hari;  
Eurusted ha levezek skedus zo tremenet  
'Vel en oabl ar goumoulenn gant an avel kaset.

Ne welin mui da lagad ker lemm ha ker laouen  
O virvi gant plijadur, en ti pa erruen,  
Da zornig gwenn ker mibin o trei ar c'har endro,  
Da vouez flour mui na glevin o kana ma gwerzo.

Pa oamp er c'hatekismou, hon daou c'hoaz bugale,  
Hor c'halonou diskiant, e kuz en em gleve;  
Dirak Gwer'hez ar c'hroaz-hent nag a wech e touejomp  
Na erruje birviken disparti etrezomp.

Yaouank ha dibreder, siouaz! ne ouiemp ket  
Nag a bet c'houerventez er vuhez zo hadet;  
Evidomp ne oa, neuze, Lezennou na Roue,  
N'anaveemp met eul lezenn, hini ar garante.

Keno! ma nes-amezeg, Yannig, ma gwir-vignon,  
Kamarad ma c'hoariou, ma breur dre ar galon,  
Piou a gemero bremañ lod e-barz ma foanio?  
Piou a gomzo ganin-me deus ar gêr hag ar vro?

Hepzon, te yelo bremañ d'ar parrezioù tosta,  
Da bigosat al leurioù barz al lazou-dorna;  
Hepzon, te yel' da c'hounit maout ar c'hourenadeg,  
Da zacha war rubanou e-barz ar varradeg.

Keno! ma c'hazeg velen, skañv evel eun heizez,  
Mistr evel eul logodenn, chentil 'vel eun oanez;  
N'ez santin ken, dindanon, gant an hast o tripal;  
Ma daouarn mui ne stagint ar zeinn war da dal.

Keno! ma c'hi kêz, Mindu, ma leal kamarad;  
N'efomp ken, dre ar c'hizenn, da glask roudou ar c'had;  
Ne glevin ken, er menez, da jilpadenn skiltrus;  
War ma dorn mui ne zantin da deod karantezus.

A-benn eun nebeut amzer, kalz a vignoned yen,  
'Barz ar zoudard divroet, hep mar, ne zonfont ken,  
Mes da galon-te, Mindu, n'eo ket ken ankouezus:  
Pell e ri c'hoaz ma c'hañvou, gant da yezou klemmus.

Keno 'ta, plijadurioù, leurioù-nevez, prejou,  
Nezadegou, nozvezioù, foarioù ha pardonioù,  
Ebatou ker birvidik, biniou sart ha sklintin,  
Ne drido mui ma c'halon gant da zonioù lirzin.

Keno kement a garan, keno da virviken!  
Pell ouc'h a Vreiz me varvo, mantret gant an anken,  
'Vel eur blantenn gizidik, evit ar vro krouet,  
A renk gweñvi ha mervel, kerkent m'eo divroet.

Prosper ROUX

(« Bombard Kerne, Jabadao ha Kaniri » (1), 1866.)

Kanet e veze hag e vez atao « Kimiaid » Proux war veur  
a don, ha zoken war donioù dañsal.

Eun ton kaer, implijet evit ar « C'himiaid », ha bet dastu-  
met e Lokenole gant Jef ar Penven, a gaver en dastumadennig  
« Kanomp laouen » (Niv. 1), embannet evit Skol-Hañv « Ar  
Falz » 1952.

(1) Ar C'himiaid kenta (« Quimiaid eur zoudard yaouank »),  
embannet e « Canaouennou » 1838, a oa disheñvel eun distera,  
evit gwerzennoù a zo. Da skouer:

1

Va c'halon a zo frailhet dre nerz va ankenio,  
Em daoulagad entanet ne neus ken a zaero...

2

Adieu dit va zi balan, war leinig ar gree'henn,  
Tachennig c'hlas war bini, bugel, e c'hoarienn...

3

... 'Vit pourvei dec'h bara, 'vel ma peus grêt dezañ...

## Distro ar Zoudard e Breiz

Da welet a ran adarre,  
Ma bro garet, Menez-Are, —  
Pell diouzin poan hag enkreuz!  
Tridal a ran gant levenez!

Gwelet a ran, — pell en draonienn,  
Tour an iliz, er goumoulenn;  
Ar maged, 'n eur droidellat,  
O tibrada us ti ma zad.

Klevet a ran ar c'hloc'h sklintin,  
Ar vombard, ar biniou lirzin, —  
Eun eureud a zo dre ama,  
Jabadao! ebad! tra, la, la!

Deiz mat! deiz mat! kamaraded!  
Gwin leiz ar skuell! kanomp, paotred!  
Eurvad deoc'h, priedjou nevez,  
Gant eur c'hrubuilhad bugale.

Ma mamm! ma zad! ma dous Mari!  
War ma c'halon! ha start, ho tri!  
C'hoarzomp! gouelomp! vad ra gouela,  
Gouela, gant eurusted ha joa!

Sellit ouzin! yac'h-pesk, bepred!  
Kreiz an tan-ruz, kreiz ar c'hleñved,  
C'houi a viras, Gwerc'hez c'hlan Breiz,  
Ar zoudard paour a zalc'h ho feiz.

E Rumengol, deiz ar pardon,  
M'ho trugarekaio, Itron!  
Me rai seiz tro d'an Aoter vras,  
O kerzet war ma daoulin noaz.

N'on ken soudard! Mamm, ma chupenn,  
Paet eo ma die d'al lezenn.  
Mari! tap krog er zizailhou,  
Deus da droc'ha ma moustachou.

C'hoarzin a rez! Ma! keuz 'm eus de,  
C'houez ar poultr a zo c'hoaz gante;  
Bet int skornet, bet int rouzet  
Hogen, gant den n'int bet krennet!

Tavomp war-ze, — eur pok brema; —  
Peur an eureud? — Perak ruzia?  
Lar 'ta d'am mamm, zo mamm dit-te,  
'Boe mañ da hini gant Doue.

An hanter-noz! — Prim d'ar gwele!  
Warc'hoaz vintin, abred vo de, —  
Ni a yelo, holl, a-vandenn,  
D'ober gweladenn penn-da-benn.

Redek a refomp ar prajou,  
Ar parkeier, ar brouskoajou;  
Gwelet e vo an ebeulien,  
Ar c'hezeg, ar gazeg velen,

Ar zaout, al leueou dizonet,  
Ar c'hole briz, an ejened,  
Ha (respet d'an neb am zelaou!)  
Al loen a zorc'h en e graou.

M'am eus desket eun tamm galleg,  
Kernevod on, penn-kil-ha-troad  
'M eus ket dizesket brezoneg,  
N'am eus ket ankouet ma c'himiad:

Piou na gan ma c'himiad er vro?  
Ra blijo deoc'h ma zon distro.  
O! 'vit meuli hor Breiz karet,  
Unanomp hor moueziou bepred.  
X...

D'am c'hamarad A. Bijon, Doktor-Louzaouer e  
Kemperle :

Te oar frita louzou  
Ouz droug-kof, remm, pistigou;  
Me ziduell, gant eur zon,  
An den gouliet en e galon,  
Ma ra gouela, soñjal, c'hoarzin:  
Em giz, n'on-me ket medisin?

## Tadig-koz ar Brabanser

Matiaz, goz, e gorn-dindan, e fri,  
E chod ruiet gant eur bannac'hig gwin,  
A lavare, en eur huanadi:  
— O! me zo bet, em amzer, eur poñsin!

Ma bleo melen, ken flour evel al lin,  
War ma chupenn a ruilhe rodellet,  
Ma gar nerzus a oa teurniet ken fin,  
Ma daoulagad lemm evel ar stered,

Nann, ne oe ket er seiz parroz nesa,  
Eur paotr yaouank ker galloudus ha me,  
Ken sonn a gorf, ken ledan a ziskoa,  
Ken brao stummet e-barz en e vale.

Er gourennou, me a winte paotred,  
Ar maout e oan en holl marradego,  
War ar jibier ne vanken tenn ebet:  
Ar bleo, ar pluñ, holl e ruilhent maro.

Den ne ouie evel don c'hoari vaz,  
Den ne zamme eur zac'had ponneroc'h,  
Den ne zouge sonnoc'h ar banniel bras,  
Da gas eur marc'h ne oa den akuitoc'h.

'Vel eun eostig me a ouie kana,  
'Vel eur c'hloareg me a ouie rimal,  
D'ar merc'hed koant oan ar c'hog da gonta  
Hag en dachenn, hep par evit dañsal.

Er pardonioù, gwechall pa bourmenen  
Gant ho mamm-goz, Doue d'he fardono,  
E lare 'n holl, pa vijemp o tremen:  
Setu aze brava koupl zo er vro.

Bremañ, siouaz! Bremañ, bugaligo,  
N'on met ar skeud deus ar pezh ma 'z on bet,  
Ma fenn zo moal, ma daoulagad maro,  
Ma choug krommet, ha ma c'hof-kar teuet.

Prosper PROUX

Embannet gant Taldir, Karaez, 1913, e « Prosper Proux,  
Studiadenn, Oberou » (1).

(1) « *Tadig-koz ar Brabanser* » a zo henvelaket diwar eur ganaouenn c'hallek hanvet « *Le vieux blagueur* » (Taldir, Studiadenn, p. 115).

## Perinaig hag he fodad lêz

(Mojenn)

Perinaig, ar plac'h lirzin,  
A gerze skañv da Werliskin,  
Eur podad lêz sonn war he fenn,  
Diazezet war eun dorchenn.

Lakêt he doa eur c'hoef gwenn-kann,  
Boutou nevez ha loerou moan,  
He bleo rannet, flouret giz-kêr,  
Evel diou lipadenn ouenner.

Klouar an deiz, hag an heol splann,  
Ar strouez karget a richan,  
Brao eo beva, o! ma Doue...  
Perin oa ket he fenn gant se!

Klevit ar plac'h o c'hrozmolat:  
— Ma lêz, hep mar, vo gwerzet mat,  
Teir dousenn viou neuze brenin,  
Dindan ma yer o lakain.

Me mo tri c'hlodad yer munut  
Gwareet kloz 'barz en o c'hud;  
Gwall lemm e vo fri Alanig  
Ma ne lez din gwerz eur wizig.

Ma gwiz, pa vo bras, a voc'ho;  
Savet ma moc'h, me o gwerzo,  
Gant ar priz me mo daou leue kaer,  
Marteze, zoken, eun ouenner.

Setu din lêz a-leiz ar pod,  
Amann melen (en ma) ribod,  
Ma yalc'h a bonnera bemde,  
Me vo eur baborez neuze!

Pentet evel eur bennherez,  
Ar faroded ray din al lêz...  
Pipi, ma c'hoant, vo ma fried,  
Jabadao neuze vo dañset! »

Ober a ra eul lamm dañvad,  
Patatra! grillhed ar poded!  
Keno viou, moc'h, klodad, ouenner,  
Ha keno, siouaz! Pipi gouer!

Ar pod a zo brizilhonet,  
Hag al lêz er boutrenn skuilhet.  
Perinaig a skuilh daelou,  
Ar c'hi a lip e vuzellou.

Perinaig deus huñvreet,  
Kreiz he huñvre eo dihunet.  
Piou na huñvre ket er bed-ma?  
Ar fura koulz hag ar zota.

Ar paour a huñvre er madou,  
Ar pinvidik en enoriou,  
Ar c'hlanvour a huñvre yec'hed;  
An Ankou o dihun abred.

Prosper PROUX

(« Bombard Kerne », Moulerez Le Goffic,  
Gwengamp, 1866.)



#### GERIOU BREZONEG BRO-DREGER

1. — Verbou (amzer-da-zont):
  - e renkfet-hu = e rankfot-c'houi, e rankoc'h;
  - pa welfot = pa welot, pa weloc'h;
  - n'efomp ken = n'aimp, ne 'z aimp ken;
  - e zonzfont ken = ne zonzjint ken;
  - a refomp = a raimp, a rimp.
2. — Liesteriou: gwerzo, - poanio, - ankenio, - daero, - bugaligo, - « o » e Treger a dalvez « ou » pe « iou » er c'horniou-bro all. Da skouer: Marradego = marradegou.
3. — Geriou berrêet:
  - Keuz 'm eus de: de = dezo.
  - Skuell = skudell.
  - Ruiet = ruziet.
  - Teuet = teuzet.
  - Gwareet = gwarezet.
4. — Gant da yezou klemmus; yezou a dalvez aman kement ha « klemmadennou », « yudadennou ».
  - E-barz en e vale = en e vale.
  - 26vet gwerzenn « Perinaig »: e leor Proux e lenner: « Amann velenn e vaz ribod ». (?)

41

Marvailh Nedeleg

## Ar Bleiz-marc'h

(Emañ Alan Per, an ozac'h, o konta d'e vugale ha d'e amezeien, deut da dremen beilhadeg Nedeleg, ar pez en em gavas gantañ, pemzek vloaz zo, p'edo o keuneuta e Koad-ar-C'hranou.)

— Olier amañ en deus soñj mat eus ar reuz a voe er vro, gwechall, gant ar bleizi. Ne dremene goañvez ebet ne vije tizet ganto tud, bugale da vihana... Dont a rént en noz er c'heriadennou distro hag e samment ganto piou bennak en em gave diwezat o vale, nemet eur gwaz a veze hag eur benveg bennak en e zorn d'en em zifenn...

Ar bloaz ma lavaran deoc'h, bloavezh kriz ken na varve al lann war ar girzier, deñved, leueou, saout ivez a oa bet skrapet er parkeier ha betek er c'hreier, amañ, war-dro ar c'hoad. Tud, zoken, a oa bet e riskl o buhez gant eur bleiz bras, eur « bleiz-marc'h » hag a lakê ar spouron dre-holl.

Ne grede ket ken d'ar mammoù kas o bugale d'ar skol; ar merc'hed ne gredent ket ken bale goude serr-noz; ar baotred, e meur a lec'h, eo a ranke kas boued d'ar moc'h ha d'ar zaout diouz ar beure ha diouz an noz.

An aotrou person a zisklerias er gador ne vije ket lavaret oferenn hanter-noz Nedeleg, rak ne felle ket gantañ gwelet an dud o tont, e riskl o buhez, d'an iliz da greiz an noz. Nevez a oa, eur bugel a oa bet sammet diwar dreujou ti e dud gant ar bleiz-marc'h. Al loen-ze, kement hag eun ouenner vloaz, a oa bet gwelet meur a wech, e pevar c'horn ar barrez; n'en doa ket aon da vale, zoken war greiz an deiz kaer, ha da lammat war ar vesaerien koulz ha war o loened.

Klasket e oa bet tizout anezañ; ki ebet, avat, ne grede mont warnañ hag an holl chaseerien a oa distroet d'ar gêr gak. Digarez a-walc'h eta d'an aotrou person da gloza dor e iliz da noz Nedeleg.

Kement rak-se, me a fellas din ober ar gouel, gwella ma c'helljen, amañ en ti. Bep bloaz e pourchasen, eur pennad a-raok, eun eteo-Nedeleg, eur zouch gwezenn zero ben-nak pe eur pezh fao-put, ar seurt-se ha n'hell ket ar vouc'hal mont enno. Eur zadorn d'abardaez ha me ha kavout eur vouc'hal troad berr hag eur zac'h a zervije din da geunenta. Soaz amañ, o c'houzout pelec'h e vennen mont, a reas he zeiz posubl evit derc'hel ac'hanon er gêr:

— Ba! ba! mon-me. D'ar vugale e vez grêt aon gant ar bleiz! Met da vleiz-marc'h ne spont ket ac'hanon! Ma her c'havan, me lakaio anezañ em zac'h...

Hag ar paotr endro...

Yen e oa ken na zuilhe: erc'h skornet ha teo a oa war an douar hag an amzer a oa stummet adarre diouz ober erc'h. Al loar en he c'hann a bigne du-hont, ruz-tan, dreist bolz ar c'hoajou. Ar stered a oa krog da ziwan en oabl, e-giz bleun aour en eur flourenn c'hlas. Trouz ebet war ar mêziou na kristen ebet war vale...

Goude eur pennad kerzed, en em gavis el lanneg e-lec'h am moa taolet evez ouz eur zouch dero, noaz ha kalet, di-wisket ar wignenn diwarnañ gant an amzer, evel ar c'hig diwar eun askorn. Lann hir, uheloc'h kalz egedon, a garge al lanneg betek war ar c'hleuniou; eun tammig gwenojenn hepken, grêt gant al loened pa deuent d'ar peuri d'ar park-se, a hede ar girzier tro-dro. Hag e soñjen, en eur dreuzi al lann hag ar strouez: « Amañ ez eus bodenn vat ha frank d'eur bleiz ha da veur a hini... »

Bale a rên eta gant evez, va bouc'hal em dorn. Pa voen erru gant ar zouch, e rankis, ken don ha ma oa an douvez dindanañ, krapat gant ar c'harz da gaout va zu warnañ. Tenna a ris an erc'h diwar e dro gant va daouarn ha p'am moe dizoloet ar wrizienn vras, e skois eun taol ponner gant va bouc'hal... Dao!... Kerkent, eur yudadenn spontus, hag eul loen deo a lammas diouz an douvez, hogosik a-zindan va zreid, hag a zistroas warnon, diou c'hlaouenn ruz hag eur skilfou gwenn en e benn:

— Ar bleiz! emon-me. Ha ne voen ket pell evit gouzout oa ar bleiz-marc'h e oa.

Eul lamm a reas war ar c'hleun, evel ma rafe eur c'hi, da goueza warnon a-ziadreñv. Ne voen ket pelloc'h egetañ o lammat dreist an douvez el lanneg; ma lavariz dezañ neuze, e brezoneg mat:

— Alo, paotr, deus bremañ!

Ma oa lemm e zaoulagad, va re-me a oa ivez, ha va dorn, war va bouc'hal, ne grene ket.

Al loen a jomas eur pennadig difiñv, chouchet, prest da gregi. Hag heñ hag ober adarre e lamm. Va bouc'hal a yudas ker prim all hag hen tizas a-raok m'oa kouezet war e baoiou... Eur yudadenn gounnaret; met ne oa nemet gloazet...

Dampret! tudou, froma ra c'hoaz va gwad pa zoñjan!... Ar bleiz-marc'h a zistroas krenn hag a frammas warnon; diou gammed a-dreñv ha va bouc'hal a gouezas adarre war e gostou. En dro-mañ, e oa bet gwasoc'h tizet, rak asoupa a reas war e zivesker. N'am moe ket amzer, koulskoude, da rei eun all dezañ ma oa en e zav ha warnon... Va zaol a jomas berr; ne dizas ket anezañ a-blomm. Koueza a ris war va glin kleiz, gant ar bleiz e dreid a-raok war va diouскоaz ha, war va dremm, e alan entanet. Skei a ris va fenn dindan e c'har dehou, kregi en e greiz a-dro-vriad ha da starda ma ouien ober!...

Alies em buhez em moa grêt krogou gouren: biskoaz seurt hini! Gwad ar bleiz a rede war an erc'h, ha va hini ivez, rak e ivinou a skrabe va c'hein ha va diouvorzed. Kregi n'helle ket, dalc'het evel ma oa ha ret dezañ tenna stank e alan gant ar bec'h a lakên warnañ. Her mouga a felle din, hep beza ret cheñch lec'h, rak neuze e skilfou o dije labouret. Hag e starden ken e strake va diouскоaz. Hogen, eskern ar bleiz a strake ive. 'N em zifreta rê 'vel eun diaoul, met me oa harpet mat diwar va daoulin ha va zreid, ha va diouvec'h ne oan ket o vont da ziskoulma!

— C'hoari 'ta! emezon. Loen vil!

Eur momed c'hoaz... Poueza ris gwasoc'h-gwas gant an holl nerz a jome em c'halon hag em izili!... Santout a ris souden, dre e c'heol entanet, ar gwad tomm o vera war va c'hein; e benn a gouezas gantañ hag e gorf a zistennas. Eur zachadenn pe ziou hag en em lezas da vont flak etre va diouvec'h... Maro oa...

Piou a lammas a-dreñv? Me, a-dra-zur, ha kregi em bouc'hal; Eun taol kounnaret a-dreuz d'e c'houzoug hag e

ruilhas e benn en douvez... Ar gwad a blommas diouz ar gwazied troc'het hag a ruzias an erc'h tro-dro...

Me a deuas an derzienn din neuze. 'Vel eur barr deliou en em lakis da grena, da grena, ma kouezis hanter zemplet d'an douar: erru e oan e penn va nerz. Eun dornad erc'h sunet a dammou a reas vad din... Eur pennad e voen o tenna va alan.

Pa 'n em gavis sonn adarre war va zachou, e soñjis e tlee Soaz beza nec'het ganin, dreist-holl ma he doa klevet ar bleiz o yudal... Ha me tapout va zac'h... Ya, met ne oa eteo ebet e-barz? Mat, setu amañ an hini am eus diskloñset, penn ar bleiz. Teurel anezañ er zac'h hag ar zac'h war va c'hein ne badas ket pell ouzin d'ober.

— D'ar gêr bremañ! emon-me.

Va c'halon a dride; nijal am mije grêt...

— N'eo ket gwall deo an eteo a zo deut ganit! eme Soaz, p'am gwelas o tont en ti gant va zac'hadig.

— Mat! Start eo bet da gaout, da vihana!

— Ne peus ket klevet ar bleiz o yudal? emezi, an dour en he daoulagad.

En eur lavaret ze, he doa tapet krog e lost va zac'h hag e tiskargas anezañ war leurenn an ti. Va Doue! Pebez skrijadenn a deuas ganti!... Lammat a reas da gorn an tan en eur guzat he daoulagad gant he daou zorn:

— Soaz! Soaz! emezon; gwelet a rez eo maro!

Ne zifromas ket ken na voe da zaou zevez goude...

... Me ivez a jomas eur pennad evel notet va izili ouzin... N'eus forz, an deiz war-lerc'h, pa voe gouezet e oa maro ar bleiz bras, an holl a voe stad enno. An aotrou person a lavaras e vije grêt oferenn hanter-noz...

Ret e voe din mont da gestal gant kroc'hen va bleiz. Da dri bloaz goude, n'am moe ket ezomm da laza penmoc'h ebet... Seurt derou-mat n'am eus ket bet abaoe...

Diwar « *Derou-mat Alan Per* »,  
kontadenn gant BREIZADIG  
e « *Feiz-ha-Breiz* » (1925).



## Troiad an Eginane

*Gwechall, e lavar KERVARKER en e « Varzaz-Breiz », e yé ar re baour da gestal a di da di da vare gouel Nedeleg. Mont a rênt a vandennadou, ganto eur c'hoz marc'h rubanennet, hag e choment a-zao e-tal pep dor.*

*Unan anezo a stage neuze da gana « Son an Eginane ». Alies mestr an ti a responte gant eur c'houblad bennak ive, hag, etrezañ ha kaner strollad ar beorien, e save eun « disput » rimadellet, fentus ha troet-kaer, a-seurt an hini a zo amañ da heul eun darn anezi, — hag a vije bet, diouz ma lavar Kervarker, dastumet gantañ e bro-Speied.*

— Ni zo deuet da doull ho tour  
Da gerc'hat kig da drompa 'n dour.  
Eginane! Eginane!

... — Mar doc'h-hu Eginanerien,  
Pelec'h emañ ar zonerien?

— En eur lammat a-dreuz ar waz,  
Emañ bet kreouet ar zac'h bras.

— Ma c'hig a zo d'al lae, er zolier,  
Ha pelec'h 'mañ 'r skeul, ne ouier,

— Neket ret kaout skeul d'ar c'haz  
Evit pakat logod pe raz.

— Et eo ar wreg da Zant-Divi,  
Hag êt an alc'houeou ganti.

— Ganeomp zo deut eun alc'houeer,  
Hag heñ eur mailh en e vicher.

— Abarz ma teufec'h barz an ti,  
Skorno ar glao eus beg ho fri.

— En an' Doue, komzet seven;  
An noz zo du, an avel yen.

En an' Doue, hastet, tud ker,  
Ni 'n eus c'hoaz seiz leo da ober.

... ..  
*Goude eul lostad goulennoù ha respontchou rimet evelse, en o zouez divinadennou, e veze grêt d'ar gesterien dont tre en ti. Roët dezo pezh a glaskent, kig-sall peurvuia, mont a rênt kuit en eur gana meuleudi tud an ti:*

— Loskomp eur youc'hadenn bremañ,  
Pa deuzomp bet hon Eginan;

Pa deuzomp bet eun troatad gwenn,  
Ha kerc'h ha segal c'hoaz ouspenn.

Eur youc'hadenn d'ar vamm, d'an tad,  
Ha da vugale an tiad!

C'houez ar yec'hed gant ho paotred!  
C'houez al lavan gant ho merc'hed!

Bloavez c'houiled, bloavez gliz,  
Bloavez kerc'h ha bloavez gwiniz!

E-barz ho liorz, kanab gae  
A-benn ha pa deuo miz mae!

... Ha deomp-ni endro da vale,  
Paotred vat, ken na zeuy an de.

Diwar « Barzaz-Breiz ».



#### GERIOU BREZONEG KERNE

- ho tour = ho tor.
- kreouet = krevet.
- alc'houeou, alc'houeer = alc'houeziou, alc'houezer.
- Pa deuzomp bet = pa hon eus (p'hon eus) bet.

